

Miz Here 1904.

Rummen 8. — Bloavez. I

AR VRO

KELAOUENGELC'H
MIZIEK

KROUET EVIT BEZA

EUN ^{ERE} ERE
ETRE

AR VRETONED



*Setu an heol aour o sevel
Kag o tiriull war Dreiz-Izol.....
Taldir*



Dindan Renadur :

An Aotrou Fanch JAFFRENOU "Taldir"

EUZ A VOULLEREZ AR GWAZIOU HA JAFFRENOU E KERAEZ (Penn ar Bed)

En gwerz en holl stalioù Lec'hioù gwir vretan

*L. de Jaffres
1904*

Paëroniez "Ar Vro" :

An Aotrou 'N Eskop DUBOURG — An Aotrou Markiz ha Kannad AN ESTOURBEILLON
An Aotrou Kannad LAMY — An Aotrou Kannad HEMON
An Aotrou Markiz FREDERIK A GEROUARTZ — An Aotrou Drouiz IAN AR FUSTEK, " AB GWILLERM "
An Itron Enorus MOSHER — An Itron Enorus ANNA A GERVENOAEL

KOUMANANCHOU :

Breiz ha Bro-C'hall : 16 real | *Breiz-Veur ha lec'hiou-all : 20 real*
PRIZ EUR RUMMEN : **7** GWENNEK

Stagaden d'ar Gelaouen vizek " AR VRO "

Renet gant FANCH JAFFRENNOU " TALDIR "

(Moulet en Keraez, en Ti-Moullerez dre dan AR GWAZIOU ha JAFFRENNOU



An Aotrou Markiz Regis an ESTOURBEILLON

BARZ A VREIZ-IZEL HAG A VREIZ-VEUR

PENN-RENER " KEVREDIGEZ BROADUS BREIZ "

Kannad Gwened er Gambr

Humbl eo evel eun den a bobl
Petra bennag eo a ouenn nobl ;
Ledan eo e skiant natur,
E galon a zo mad ha fur,
Hag en Breiz-lzel peb Breton
A ra dioutan e vignon.

KRENNAD :
Jannedik <small>TALDIR</small>
Gwened <small>AR GARREK</small>
Mikel hag e azen <small>KELEN GLAZ</small>
War an huel <small>AR C'HOZEK</small>
Guillemet ar Gouilhouden <small>PROSPER PROUX</small>

AR VRO

Penn-Renner :

FANCH JAFFRENOU " TALDIR "

« Kaz an den ha na gar ar Vro a vag anezan »

Tennet deuz Aliou mad Sant KADO

(Myvorian, Archeology, levr. III., d. 40, rimel, 3.)

KRENNAD :
Traou a hirio <small>X...</small>
Ar Golladenn <small>PER PRONOST</small>
Ma bro Garet <small>ERWAN SEBILLOT</small>
Leorlennadur <small>X...</small>

JANEDIK

Pez-C'hoari evid ar Merc'hed iaouank

C'HOARIEREZED :

JANEDIK, paizantez iaouank.
AUGUSTINA, keginerez en Pariz.
MARI-JAN, mam Janedik.
MAC'HARIT, c'hoar Janedik.
EUN ITRON deuz Pariz.

ARVEST KENTA

RANN I

JANEDIK, AUGUSTINA

JANEDIK

Sell ! Augustina ! Erru out war da giz da weled da vro eur pennad amzer !

AUGUSTINA

Oh ! Paz evid gwall bell, Janedik kez. Deut on hepken da ober eun tam pourmenaden. Daoust ha te gav d'id e trokfen brema ma c'hear a Bariz deuz ar c'hoz toull parroz-ma !

JANEDIK

Oh ! Eur c'hoz toull parroz a larez-te ?

AUGUSTINA

Ia, fe, eun toull... Sell, Janedik kez, a-boan e oan diskennet deuz an train ma poueze an ear-ma warhanon dija ! Ha gwasoc'h 'ta, plac'h kez ! Komprenn ma mam a zo hanter ampustur, ha bec'h awalc'h am meuz oc'h intent he c'hoz brezonek ! Ia, sonj pemp pla zo 'on bet hep kaozeal brezonek ; na gav ket d'id am meuz bet amzer d'ankouaat ma giriou ? Ken asur-hag 'on ama, poan a ra d'in komz al langach-ze.

JANEDIK

Ma me gav d'in n'ankounafen biken ma brezonek.

AUGUSTINA

Ta, Ta ! Ia, te lar ze ! Mez pa na glever nemed gallek tout ! Neuze 've red mad ankouaat ar brezonek. Evidon-me pepred, ne n'on ket evit intent ma mam. Mez bah ! Eun taol mad a gaer ! Evid pez am meuz da chom ama 'vad ! Eun eiz de bennag ha 'kuit raktal. Hast am meuz da vond war ma ch'iz du-ze, ia zur.

JANEDIK

Ken brao-ze eo Pariz 'ta ?

AUGUSTINA

Plac'h kez, an hini n'eo ket bet 'meaz e doull, n'all ket komprenn pegen kaer eo ar gear-ze ! Te na gredfez ket ahanon na pa gontfen d'id ar wirione. En Pariz, an noz a ve memez tra 'vel an de. En Pariz na oar ket an nen pegoulz e ve leval, ken skler ma ve ar ruiou, ken skedus ma ve an tier hag ar staliou 'bord ar ruiou. Diabarz an tier a luc'h gant an elektrisite, hag awalc'h e ve stoka ar biz deuz eur boton bihan, evid digas ar sklerijen hag elumi an holl c'houlou asamblez. Na pegen douz eo beva en Pariz 'tal-kichen ama ! Eno ar merc'hed iaouank a gav plijadurezou deuz ho mod, diduamanchou ha dillad kaer, pere a zo mil gwech bravoc'h, vel-d e welez, evid ar c'hoefou hag ar c'horfennou a zouger dre ama...

JANEDIK

Ia 'vad, da zillad a zo brao ! Da dok a zo leun a fleur a beb seurt liou. Oh ! na me garche kaout eun tok e giz-ze !

AUGUSTINA

Ha c'hoaz, plac'h paour, ze n'eo netra ! Ha ma larfen d'id peseurt komanant am meuz beb bla ! Keginerez 'on en ti bourc'hizien pinvidik-mor hag a ro d'in... divun ? Pevar c'hant liur ar bla, ha kazi mann a-bed d'ober. An aotrou hag an itron a zo arru koz, ha na resevont ket nemeur a dud. Hanter amzer, e ven lipr da vond da vale dre gear, ha da bourmenn lec'h am me c'hoant, gant neb a garan. Den d'am hentcha, den d'am skandali !

JANEDIK

Te 'peuz chanz, Augustina.

AUGUSTINA

Chanz ? ... Eno, ar mitijen all a c'hall lavaret int ken eurus ha me. Me a anave ouspenn dek Bretonnez deuz ar c'hanton-ma, hag a zo ive plaset mad.

JANEDIK

Eaz eo neuze kaout eur plas mad ?

AUGUSTINA

Me oar tri pe bevar blas mad da gemer.

JANEDIK

Gwir ?...

AUGUSTINA

Ia.

JANEDIK

Mar kredfen... Kaout a ra d'id mar c'hâfen d'unan anê e ven kemeret ?

AUGUSTINA

Na petra 'ta ? Eur plac'h koant ha konsekant eveldout a ve prez d'hi c'hemer, m'hen asur d'id, hag hep chipotal. Sell, e-tal duma 'zo eun aotrou hag eun itron, daou vugel d'ê, hag a c'houlenn eur plac'h-a-gampr. Sur 'on te a rafe mad o affer. Kant skoed ar blâ eo ar gomanant eno, da gomans, ha kresk beb blâ !

JANEDIK

Ma Jezuz ! Kant skoed ar blâ !

AUGUSTINA

Ia, kant skoed. Ha gant-se, peuz ket 'med lâret ha disul e partifomp a gevred.

JANEDIK

Ia... mez ma mam ?... ma c'hoar ?...

AUGUSTINA

Eun taol kaër ! Tro brao da gont d'ê ha zur out e vi lezet da vond.

JANEDIK

Me esao, hag a rento respont d'id.

AUGUSTINA

Kenavo d'id neuze, Janedik... Na gavi gwech a-bed ken eun okasion evel honnez ! (*Mond a ra kuit*).

RANN II

JANEDIK, (*he-unan*)

Arsa ia 'vad ! Rezon he deuz Augustina. Perag chom dre ama da frita paourentez pa c'halla bea pinvik hag eürus en Pariz. kaout dillajou kaër, mond aliez da bourmen, hag ober d'am fenn ? O nan a-vad ! A briz a-bed na chomin ken ama. Bôon... Sed arru just ma mam ama, asamblez gant ma c'hoar Mac'harit.

RANN III

JANEDIK, he MAM, MAC'HARIT

AR VAM

Allo, Janedik, poent braz eo mond da gas ar saout er-meaz !

JANEDIK (*faëns*)

Da gas ar saout ? Pell awalc'h on-me bet, mechanz, o kas hag o kerc'hat ar saout, o stleja ma boutou dre an teil, hag o libri ioud silet. Me lâr d'ac'h, mam, ar vicher-ze na choul-lan ket ober ken.

AR VAM

Ha petra ri 'ta Janedik ?

JANEDIK

Mond e-kuit ac'hann.

AR VAM

Da belec'h, o ma Doue binniget ? Ha penaoz e rin-me ama gant da c'hoar da zerc'hel ar vereudi, pa n'euz 'med eur mevel koz ganemp ?

JANEDIK

Me ac'h eï da c'honid arc'hant da Bariz, mam, hag a zikouro ahanoc'h gwelloc'h evid na ran dre ama. En em zikour ma-hun e rin ive...

MAC'HARIT (*ankeniet*)

O sonjal mond da Bariz out, Janedik ?

JANEDIK

Ia, Mac'harit, da Bariz. Te zo souezet ? Pariz ne 'ma ket er penn all d'ar bed. Meur a hini a zo eat arogon-me da Bariz !...

MAC'HARIT

Ia, meur a hini, siwaz da galz anê. Mez lâr d'id, me bari eo ar goz Augustina-ze, plac'h he fompadour, eo he deuz troet da benn d'id 'boue 'ma dre-aze ?

JANEDIK

Na pa 'defe ? Augustina 'deuz lâret ar wirionez d'in, ha mar pije klevet aneï, te da-hun e pije great eveldon.

MAC'HARIT

Me ? kuitaat ma zud ha ma Bro ?... Gwell ve ganin mervel

JANEDIK

Ma, me ve gwell ganin beva ! Hag evid beva mad hag eürus ec'h in da Bariz vel plac'h-a-gampr. Augustina a oar eur plas mad-tre evidon, gant kant skoed ar blâ da gomans, ma boued ha ma lojeiz.

AR VAM

Sorc'hennou an dra-ze, Janedik ! Kred kentoc'h da vam evid ar galouperez-bro ze ! Diwall na vez bet touëlllet, rag keünz a zeufe d'id. Evidon, n'allan ket harz ahanout da bartial, pa 'c'h eo ken kaled ze da benn, mez displijadur vraz e rez d'in sûr ! (*kregi ra da ouela*).

JANEDIK

Foeï, mam, gouela ! Gwell e ve d'ac'h en em lawenaat, pa lâran d'ac'h e tigasın arc'hant d'ac'h d'ar gear, be-wech hag ho pô ezom...

MAC'HARIT

Mar na ve ket d'emp da gas d'id, kentoc'h !...

JANEDIK

Mac'harit, te zo klask goapaat ahanon. Mez gra hardi ! Me dapo 'hanout. Te 'n em grigno goudeze, en eur weled ahanon o sevel, pa chomi te war da deil ha da villik-kram-poez ! Ia, gra da vin hardi ar pez a gari !

AR VAM

Mac'harit, poan spered am meuz ma gwalc'h gant Janedik. N'allan ken päd. Demp ac'hann. Lezomp aneï d'ober he fenn, ar paour kez plac'hik vihan .. O ma Doue, bet truez ouzomp ! Gwerchez Vari, diwalled aneï ! (*Mond a raint kuit*)

RANN IV

JANEDIK (*he-unan*)

Deut 'on a-benn deuz ma zaol 'vit-se ! Breman eo koulz d'in mond da brienti ma fakajou hag eur gwennek bennag, ha 'benn disul, iô da Bariz 'samblez gant Augustina. Brava planeden ma hini !... Sell 'ta, me wel Augustina du-hont... (*Gervel a ra*) Augustina iô ?

RANN V

JANEDIK, AUGUSTINA

AUGUSTINA

Te 'peuz galvet ahanon ?

JANEDIK

Ia, da lâret d'id meuz goneet ar barti. Lâret 'meuz da mam. Partia rin ganid disul.

AUGUSTINA

Ha, ha! Me ra eur plac'h a spered ganid, Janedik. Ze ziskouez n'out ket ken divead hag an darnvuia deuz merched ar barroz. Te, diâna, a oar pelec'h ema da blijadur ha da interest. Ar re-ma, dre ama, na ouiont 'med goro ha turc'hial, ha c'hoaz ho deve poan o tastum eur gwennegik ben-nag. Te 'peuz gouveet e peseurt tu e oa ar fortun. Ma, Janedik, demp neuze hon diou ma kanimp asamblez eur son c'hallek deuz Pariz. Sell eur feillen aze. (*Rei a ra eur paper da Janedik*) Ar Barizianed, plac'h kez, ar re-ze 'vad, a oar ober soniou brao, n'eo ket vel-d ar re dre ama sùr,... foel!

(*O diou e kanont*):

Dans le jardin d'mon père
Les lauriers sont fleuris,
La caille, la tourterelle
Y vont faire leurs nids.

Refrain:

Allons, ma mignonne.
Dansons, chantons aujourd'hui!
Allons, ma mignonne,
Venons à Paris.

La caille, la tourterelle
Y vont faire leurs nids
Et la blanche colombe
Et la jolie perdrix.

Allons ma mignonne etc.

Et la blanche colombe
Et la jolie perdrix
Qui chantent pour les filles
Qui s'en vont à Paris

Allons, ma mignonne etc.

Qui chantent pour les filles
Qui s'en vont à Paris,
Qui vont chercher fortune
Bien loin de leur pays.

Allons ma mignonne etc.

Qui vont chercher fortune
Bien loin de leur pays.

Et qui seront heureuses
Comme dans le Paradis.

Et qui seront heureuses
Et se riront de celles

Qui restent au pays!

Allons ma mignonne etc.

(*Ar ridoch a gouez*)

TALDIR.

D'hon Lennerien

Ar rummen-ma deuz *Ar Vro* na n'euz enni nemed dek pajen elec'h daouzek.

An dra-ze a zeu deuz an drubuill hon euz bet evid ar mare gant hon moullerez nevez evit renka hon holl mekanikou.

Hon lennerien o devo zur mad ar vadelez da iskuzi ahanomp.

GWENED

Seulvui ma tigwe d'in gwelet eur Gwenedour,
Seulvui 'kavan stumet 'nean deuz eur c'hadour,
Reud e zivrec'h, kaled e zorn, têt e lagad,
Eur c'houriz lêt gantan vel o font d'an argad,
E dok war grap e benn ken e kuz e skouarn,
Stard e benn-baz etre e vizied houarn.

Hag e sonjan: « Henez breman zo daou vil bloa
« A lakaz da Sezar an daouarn war e skoa;
« Henez, kant vloa zo bet, e kreiz an noz du-dall,
« A iouc'he dre 'r c'hoajou da gelen Kadudall;
« Henez, hirie zo prest adarre da zével
« Kerkent ma vo en Breiz c'houezet tan ar brezel ».

Na oar den ped kanved a welaz o tremen,
Vel ar gwall amzeriou war chouk e beulioù men;
Nag ennan nag ennê n'euz bet netra finvet;
Ar vein gant an amzer n'int foeltr tamm dislivet.
Hag hen 'n em dalc'h henvel, koulz en mad, koulz en fall,
« I vrehonek geton, malahtu! el gueral ».

—o—

Kaled ouz al labour ha kaled ouz ar boan,
Potr Gwened zo diglemm, dibreder ha dizoan;
Ne ra-forz rag madou na forz rag dienez,
Gant ma c'hallo tanvat eun tammik levenez.
Ha diwar nebeudik ve laouen e galon:
Klevet ar biniou pe ar vombard o sôn,
Sethu trawalc'h evit hen lakat da lammet
Ha da drei skanv en dro, e c'harr gantan kammet:
Eur banne jistr melen diskennet 'n e skudel,
Hag e krog da gana zôniou koz Breiz-lzel.

Mez, pe a ra dreist holl d'e galon sederat,
Eo lagad e vestrez o furchal e lagad,
Pa vent oc'h ober lez, eur zulvez d'abardae,
Azeet tal ha tal, netra ken en dro d'ê;
Pe he bizik bihan skoulmet en dro d'e viz
Pa zansont troad oc'h troad war leur-gêr an Iliz.
Epad ma vent kaset gant 'zon ar biniou,
Dreist an holl draou marvel da vro an hunvreou!

Netra er bed, nag aour, na perlez, nag arc'hant,
Netra da botr Gwened na dalv e zousik koant:
Hi zo ken brao, ken flour, he chodigou ken ru,
Hag e bleo ken melen dindan ar c'hapo du!
Ha, goude m'eo digomz he muzellou eüruz,
He lagadigou glaz a zell ken kôzeüz!

Bean 'n euz potr iaouank Gwened eur resped all
A ra d'e benn plega ha d'e galon tridal:
Doujanz an tad, ar vamm, brêvet gant ar vuhe
Hag a vè 'korn an tan o c'hortoz galv Doue;
O daou en tiegez e kasont c'hoaz ar penn
Abalamour m'int koz hag e tougont bleo gwenn!

—o—

O tud ar stum gwechall, iaouankiz birvidik,
Dremmou rust o c'holo kalonou pinvidik;
Merc'hedigou ken flamm ho bokedigou roz
Hag a bak ho kened en dillad ar c'hiz koz;
Mammou krommet dindan planedennou kaled
O foned d'ar be ien dre domder an oaled;
Ho c'houi, tadigou koz brasoc'h vit rouane,

Digor ho taoulagad da zellet ouz an nê,
 Ho ple war ho tioukkoa rannet deuz a bep tu,
 Ho penn-baz en ho torn, prest da vale dustu
 Pa deui ael an ankou d'ho klask vit ar vered,
 Dirazoc'h-c'houi 'chom mud ha diskrog ar spered !
 C'houi zo Goulennou beo dirak pere e spont
 Hon zammou pennou paour da viken direspont :
 Buhanoc'h e kawfemp ger kuzet ar vein braz
 Renket war lann Garnak vel brezelourien noaz,
 Evit ho kwir hano, evit ar gwir alc'houe
 Deuz ho sekrejou pell, o gouenn-tud dianve !

PLOUIGNEO

T. AR GARREK.

Mikel hag e Azen

FIDORIEN

Etal en abati a Langoumet e oe guerahal deu zen koh,
 Mikel ha Barban e voez; marhadizion amonen e oent. Ind
 e brene amonen ar er mezeu eit er guerhein ér foerieu hag
 er marhadou tro ha tro. Ur harig sklejjet dre un azen e
 chervije dehe eit kas ou marhadoureh d'en tu ha d'en tu ral.

Mikel e laras un de de Varban: — « Me moez peur, ni
 hrehe mat guerhein bremen en famig lon hun des: ean zou
 iaouank, maget mat e, ha ni e saïou argant mat anchou ».

— Fe Doue? ia, e reskondas Barban, hui e lar guir. Ar-
 hoah e vou foer er Faouet; mad e hreheh monet gefou
 d'inou. »

En treno, Mikel e saïas mintin mat. Ne oe ket hoah
 golen e ti erbet a p'hum lakas ar hent er Faouet. Kerhein e
 hre ar e hoarigeu en ur zebreïn un tam bara, en azen e ie
 ar e lerh en er stag.

Goude un er kerhet e tigoehas Mikel en ul leh hanuel
Toul-el-Laeron hag e oe gronet a bep tu a lann hag a goed.
 En un taul en azen hum lakas de den ardran. — « Deit
 enta, lonih peur, eme Mikel, ne gollamb ket amzer: mal e
 vou d'omb monet ».

Mes en azen e zalhe de hal atan ardran par ma helle.

Mikel e zistroas neze eit sellet pétra e oe arriu get e lon,
 mes azen erbet ne oe ket mui. En e leh, Mikel e huclas un
 den gusket e hiz ur menah hag en doe hum daulet ar e
 zeulin ?

— Pardon e houlenan genoh, e reskondas en aral, me
 zou ur menah. Bout e zou guerso, groeit em boe ur pehed
 bras hag, a balamor dehou. Doue en des me lakeit de vout
 azen. Hiniu, ag en er-men, e achiu me finijen. Hui e hues
 kol doh kement men a dra sur, mes pardonnet d'on elkent,
 me zad-peren keh ?

Mikel e chomas bamet, haval doh un den hag e vehe
 koehet a los lur har.

— A p'en de guir e ma en treu else, eme ean d'er menah,
 volonte Doue revou groeit !

Hag ean e bunas stag e azen ag e vreh hag e ias en dro
 d'er ger.

A pe oe arriu, rein e hras en douere de Varban: — Ur
 goal valeur e zou arriu genomb, eme Mikel, el lonnig hun
 boe e zou kollet d'omb, moez keh ! Hui grede el d'on e oe
 un azen hun boe hag e oe; ur menah hag e oe bet kon-
 daunet de vout azen a balamor d'ur pehed bras en doe
 groeit.

En ur zigoueh etal koed *Toul-el-Laeron*, ean hum lakas,
 en un taul, de hal ardran hag a pe zigoehas d'on sellet doh

tou, m'er guelas troit de vout den. Ean hum daulas ar e
 zeulin etal d'on en ul laret: « Pardon e houlenan genoh ?
 Doue en des me zroeit de vout azen a balamor d'ur pehed
 bras em es bet groeit. Hiniu, ag en erm-en, e achiu me
 finijen. »

— Sellet elkent, me heh Mikel, biskoah den nen des
 hoah kleuet kement ral ! Kedave ma hou hanauan a houde
 guerso, mem behe kredet forh es e laret d'on ur fidorien...
 Biskoas elkent ! Na peh ur hol aveit omb !... Den erbet nen
 des kleuet biskoah konz ag un dra ken souehus ! Ur hueh
 neoah mem es kleuet en eutru Person a Langoumet e konz
 en e breg ag ur voez troeit de vout halen. Mes ur menah
 troeit de vout azen, piu en dehe kredet .. Guelet elkent peb
 sort treu e hueler er bed men.

Allas ! Kaer e gouiet en doe groeit er peurbed menah
 sen un torfet bras benak elkent !

Mes neket erhoalh, red e vou d'omb preneïn ul lonnig
 aral a pe vou foer vras Sant Herve e Gourin ? »

Er heh Mikel ne chonje ket muioh eit Barbon en dro e
 oe hoariet dehou: Tri laer ag en dro, hag a vicher, e oe e
 spial er hoed, tostik tra d'en hent pras. A pe zigoehas de
 Vikel tremen get e azen, unan anche, gusket giz ur menah
 e laras d'er reral: « Me ia me de drohein stag en azen, me
 gerhei ar e lere'h ur chehad amzer hag a pe vou chomet
 ardran hui en tapou hag er hasou genoh d'er hoed ! » Else
 en doe groeit.

A pe oe arriu foer Sant Herve; Mikel e ias, argant en e
 sah, eit preneïn un azen aral. Ne vanke ket lonned skoar-
 nek inou ha re a bep sort. Unan anche e oe kuhet en ur
 hornig ardran er reral. Mikel e dosta dehou, e sel hag e
 zisel doh tou: Haval mat e hanen, eme Mikel, doh en hani
 em boe arauk !... Ia, ean e a dra sur, ne farian ket, en ha-
 naueïn e hran reih mat ! — Ah ! Menah rous ! Menah ga-
 lous ! eme Mikel ar bouiz e ben d'e azen, groeit e huez
 hoah ur pehed benak pen de guir e oh troeit endro de vout
 azen ? Mes nen de ket me hou prenou d'oh er hueh men,
 nann dam !

Ha Mikel e ias pelloh...

KELEN-GLAS.

WAR AN HUEL !

Daoust d'in ne n'on touez ar Varzed
 A zo tarzeta — en Breiz-Izel
 Nemed eur c'haner pennasket
 E vouez kollet — en droigell,
 Moueziou stard an telemou braz
 E klevan c'hoaz — tiston e-leiz
 War lez ochou gwez ar mor glaz,
 Ha leuriou kraz — menciou kreiz.

Digouet eo d'in mond eun de
 Gant lorc'h ha fe — war lein kriben
 Tosen Sant Wetlaz lec'h ma oë
 Gwechall, herve — kreden hon gouen
 Eun templ savet gant drouizien goz
 Deut deuz Bro-Skoz — dreist d'an douro
 Argaset dre-holl gant ar Saoz
 Den kri ha faoz — deut en ho bro.

Eveltê meuz treuzet dinc'h
 Tri gelc'h — Anaon, Abred, Gwenved,
 Ha goude d'ar C'hrouer dibec'h

Ziwall diouz krec'h — an holl Gelled
Am meuz bet gret a-greiz kalon
Eun orezon — a drugare
Pehini da beteg e dron
A ieaz duhont — tre d'an ne.

Ragtal e santiz em gwazied
Arok sklaset — eur c'hrus tener
Ha ma memprou, arok kropet
O deuz tridet — gant an herder ;
Poull mia c'halon em c'hreiz lampe
Hag a skoe — stankoc'h taoliou
Em skouarn seblante d'in-me
Kleved ive — beb seurt soniou.

Darn a bigne deuz an dachen
A zisplegen — gant ma lagad,
Darn diwar lein ar mil dorgen
A zao ho fenn—plom, en Argoat.
Darn deuz pellder an ab ledan
Sioul ha distan — e-kreiz miz maë
A zirede deuz an drenwel,
Trouz ar mor-avel — oa gantê.

Darn oa hanval deuz ar iudou
Leusk er c'hoajou — an avel ter,
Ha darn all deuz kanaouennou
Han estigou dous ha tener.
Holl e kanent en brezonek
Hon iez ken c'houek — kaërder hon Breiz
Ha skeuden hon gouenn kalonek
Zo hep kiriek — gwasket e-leiz.

Hag e sonjen : o me garche
Deuz a Gerne — da Vro Dreger
Iou'hal ive ar soniou-ze
En avel gwe — dremenn en èr,
Vid elumi en kreiz kalon
Neb zo breton — ha breton gwir
Sec'hed frankiz ? D'hi flanta don
Dindan o bron — kaled vel dir !

Mez kaër 'no tosen sant Weltaz
En oablou glaz — sevel uhel
He fenn ken sonn, hag alan boaz
An avel braz — a Vreiz-Izel
Zon uz d'ar gwagennou trouzus
E iud skiltrus ; — ma mouez me gred
Tal ma zreid siwaz a gouezo
Hag a vougo — en draonien gled !

N'euz forz da ze ! Mar na glev ket
Ar re 'zant hirie — c'hoaz o gwad
O redek ru 'n o gwazied,
Ar re varvet — a-rañ marvad !
Hag o c'horfou c'hoaz a drido
En o beio — pa deui d'o skouarn
Ar c'han-ma savet 'barz ar iez
A gomz hep miez — o mab kadarn.

KAREDIK AR C'HOZIK.



Guillemet ar Gouilhouden

(KANAOUEN DIEMBANN)

Var don : Tosteed aman tud a skiant.

1

Na neus ket pel barz em c'halon e oa c'huezet Lusifer
Eur c'hoant braz da zastum madou ; maes penoz en em
lgemer ?

Goude bean sonjet ervad e teuz da gonklui
Ne moa ket eur voyen verroc'h eget tach da zemezi
Da Vuillemet, ar Gouilhouden, deus komanan Rest-ar-C'hi.

2

Vit kavet eur sort sonjezon, voa ret beza trelalet,
Rak neus ket, barz en Breiz-Izel, eur spontail vel Guillemet!
He fri kam karget a vutun a zo vel beg eur gaouen ;
He diou chod treut ha kreizenet, en liou d'eur goz goadigen ;
He gronch en furm d'eur vaz dotu, d'he fri a boko souden

3

He daoulagad ru ha skalfet a zo pikouzet noz-de ;
Pa ve troet un da Wengamp var zu Brest ve egile ;
En giz d'eur forn eo he geno, he dent vel eur goz rastel,
Hanval deuz bordou eur pot-kambr eo he diou foeltren muzel,
He mouez douz ha melodiuz evel hini eur porc'hel.

4

He bleo, reud vel reun ar gouizi, zo en liou d'ar c'harotez ;
He diou skouarn plad ha ledan evel kregen Sant Jakez ;
He gouk, c'huezet ha kremmenek, en he diou skoa zo kollet ;
He chouk, vel hini eur c'hanval, gant eur pezh tort zo sammet ;
Vel eur sac'h stripo, pa vale, e fustul kik he bruched.

5

En giz da zol eur goz voutez ez eo kompez he sailher.
Hec'h ivino a zo hanval deus a c'hriffo Lusifer ;
Unan ive deus he divrec'h vel eur c'herve zo guiët ;
He diouhar, en furm treid panko, a goc'h saout zo marellet ;
He zreid, vel re an houidi, en diabarz zo treujet.

6

Pan em desidiz, eur zulvez, barz en he zi-da antren
Me he c'haviz divouchouer, diskabel ha dierehen ;
O kravad kein eur wiz hudur, moc'h munud en dro d'ez ;
Unan memeuz var he barlen sioul braz o voredi,
Hag an oc'h koz e kabouilhac er chaoudouron gant he fir.

7

Savet z eo bet ma c'halon o velet eur sort markenn
Ha nebeut a zo defotet var va giz na zistrojen.
Maes ar sonj demeus he yalc'had en deveuz ma c'hourachet ;
Va zok barz em dorn, humblamant diouthi ez on tostet
Hag en eur feson respeduz em euz hi bet saludet.

8

Ar plac'hik ne voa ket, siouaz, humoret kaer an de se,
Gand min eun targas fourgaset he deus goullet diganne :
« Petra zo evit ho servich, pesort aman a glasket ? —
— Deut on, e moun-me, plac'h yaouank, en ho fi vit ho kuelec'h,
Hag en esper da gonversi ganec'h-hu mar asantet ».

9

Neuze, gant eur fas kounnaret ez eo savet ar furi
En eur danfoueltra he forc'hel ebarz en kreiz al leur-zi :

« Un diaoul, emei, gand ho konvers, ganec'h hag an holl
[botred ;
N'eo ket ar plac'h a blij d'ec'h hu, an arc'hant eo a c'hoantet ;
Divar ma zro, gant an tanfoueltr, histrogel, prim diskampet! »

10

O vel't eur pezh ken divergont, n'on ket, mar keret kredi,
Chomet dirak ar Gouilhoren, un heur da c'hinaouegi,
D'ar ger on skampet, dic'houtet dimeuz ar Briadelez,
Iac'hed mad deuz ar c'hoantegez da gaout ialc'h ar benherez,
Resolvet, kentoc'h, da zebri pad va bue patatez.

(Kaset d'Ar Vro gant F. EVEN)

PROSPER PROUX.

Traou a Hirio

KENDALC'H HOLL-GELTIEK KAERNARVON

Ar C'hendalc'h Holl-Geltiek a zo bet, ha bet eun trec'h evid gouenn ar C'helled. Biskoaz c'hoaz, na zoken en Dublin evid ar vodaden genta, ne oa bet dastumet assamblez kemend a villieriou Kelled evid kana meulodi d'o broiou, ha klask an tu d'en em glevet war gemend a zell ouz difenn o hêrez koz.

Eun dudi, a oa gweled eno milierou Kemriz, Skoziz, Iverzoniz, bochadou Manniz ha Kerneviz, leun a dan hag a garantez an eil evid egile. Eur blijadur a oa gweled ive eun nebeudik Bretoned treujet ar mor hag ar gompezennou ganto evid digas d'o breudeur a Vreiz-Veur salud tud ar Vro-ma.

Gwall nebeud, a-vad, a oa diouto. Pemp Breizad ne oant ken. An Estoarbeillon, an abad Herry, Fransez Even, an Tad Goulven Trebaol, ha Taldir. Eur Breizad-Gallo : Theodore Botrel. Ahendall, tri pe bevar Gall deut evel kiruserien. Kalz a rêzonioù a gav a re a zo chomet hep mond di, hag an hini bouezusa, eo ma koust ker ar veaj. Ze zo gwir, mez ar re a glask an digare-ze, a ra aliez beajou hir ha pelerinajou koustus, ha ne brofilont ken kemend d'ezo, war hed tost, evel ma raje eur weladen da Vro-Keumri, ar gwir vro sevennet hervez he natur, ha war behini e tle-femp kemeret skouer evid adsevel hon hini.

Petra bennag ma ne oa ket nemeur a Vretoned, ar pezh a oa anezo a oa paotred stard en o zont, hag o deuz gouiet ober enor duze d'an hano a Vreizad.

Pevar devez leun eo padet ar c'hendalc'h, ha n'euz ket bet kollet a amzer. Lavaret e vez na vez great netra a dalvoudus er c'hendalc'hou, nemed ober kontchou ha preze-gennou pere a deuz goudeze evel eur bouill moged. Kemend-se a c'hell beza gwir deuz meur a Gendalc'h, en pere ez euz tud deut da 'n em lakaat o-human en gwel kentoc'h nag evit labourat. En Kaernarvon ne oa ket evelse ar gont. Kement Kelt an nevoa fouetet arc'hant ha roet e amzer da vond di evid eur zizun, a oa e ioul digas e vean da adsevel an Ti a zo bet dismantret d'omp gant an Estranjourien hag ar Briz-Vreiziz ; hag hep pouffal, gallout a reomp lavaret eo bet diazezet ar foundamant euz an Ti-ze war galonou ouspenn dek mil Kel gwirion a dremenaz en kear Gaernarvon deuz an 30 a viz Eost d'ar 4 a viz Gwengolo 1904.

Meur a vil all, chomet er gear, a oa o spered en Kaernarvon e-pad an deizioù diankouaüs-ze.

Ar gelaouen sizuniek *Ar Bobl*, en he rummen genta, he

deuz lavaret - kement tra a zo bet tremenet, ha great e-pad ar gouelioù.

* *

Trugarez a lavar *Ar Vro* da gemend Keumro en deuz great eun digemer ken mad d'ar gannaded a Vreiz-Izel, hag ispisial da Vaer Kaernarvon, an Ao. Griffith Thomas, d'an Aotronez Daniel Rees, rener ar *Heral Cymraeg*, Eames, rener ar *Genedl*, Thomas Gwynn Jones ha Robert Guyneddon Davies, sekretourien ar C'homite. Bennoz Doue ive war An Aotrou Castletown, a Iverzon, en deuz ken skoazellet ar Gouelioù gant e gomz hag e zonezonou, ha da Fournier d'Albe sekretour ar Gevredigez Holl-Geltiek, evid ar boan en deuz kemeret da eeuna peb tra evid ar gwella.

* *

Beb tri bloaz e vez great eur C'hendalc'h Holl-Geltiek. An tosta d'omp a zigouezo 'ta er bloavez 1907. Marteze da Vreiz e teuo an enor da renka hennez.

A-benn neuze, mechant, e vemp eun tam muioc'h prest eget ne n'omp brema ; mez azalek brema eo d'omp kregi da drei spered hon c'herent, hon mignonned, hon broiz, war an tu-ze, ha digas anezo tammik ha tam da deurel o zellou, nan hepken war Franz, war Bariz, war Rom ha war pezh a dremen e goueled an Azi, mez ive war an traou gaer a zo an tosta d'o daoulagad ha ne welont ket koulskoude, war o bro o-human, ha war ar breudeur a astenn war zu d'omp, a 'z iouc'h d'ar mor, eun dorn madelezus d'hon zikour da adsevel, ha eur skouer talvoudek d'hon lakaat da gemer fizianz en amzer da zond.

AR GOLLADENN

Kerster... ha kaera ferm enn traon d'eur menez kuru-net a vodennou dero ha kelvez, e-kreiz eul liors leun a c'hwez frouez, e-kichen eur ster a zour sklear ; el leur, pevar bern huel a golo, daou vern foenn ken huel all ; eunn ti ha kreier nevez e sklent ; triouec'h aneval gorn, daouzek loen, daou bennoc'h lard, eur wiz gand he zorad moc'h bihan, ier hag houldi a-leiz.

Hag ann holl danvez-se a zo a leve da Lan ha da Ivona.

Pebez tud euruz !

Nan, siouaz ! n'int ket mui euruz Lan hag Ivona, na Jakez na Mari ho bugale ken nebeud, rag hirio da goan oa tenval ar pennou oc'h taol.

— Nan, eme Lan, enn eur jaokat he vuzellou beteg ar goad, biken n'em bije kredet kement-se euz he ferz ; Mac'haridik a garenn ar muia, evel ma karer atao ar iaouanka euz ar vandenn, Mac'haridik em oa lezet er skol beteg he c'houezek vloaz, hag euz a behini oann kenn lor'hek, dilezel en eunn taol kount he zud evit mont e kear da veva gand eunn aotrou pinvidik, ha da ren buez ar plac'hed fall ! O va Doue ! petra am euz eta great, ma teuit d'am c'hastiza kement ?

— Lavaret am oa d'e-hoc'h, va zad, eme Jakez, e lezec'h re bell amzer Mac'harit er skol, rag, evel m'eo displeget el lavar koz, da zivall a zo :

Ouz merc'h a c'hoar al latin

Vel ouz heol a zao re vintin.

— Ia, avad, eme Vari, he dournik a ioa re flour evit

greki el labour ha rei skoazel d'in ; ann dimezel a boan ma krede mont e kear da werza al leaz diouz ar min-itn ; mez e doa, eme-z-hi, o vlenia eul loen ken divalo starnet ouz eur c'hoz karr a ziu rod.

— Ha brema m'oar vad, eme Lan, en eur skei ken kren war ann daol ma strinkaz al leaz er meaz euz ar skudellou, e deuz eur mevel evit bleina karr-tan he aotrou.

— Gwir a livirit, va zad, eme Jakez, rag ar golladenn a zo bet gwelet o tremen dre henchou braz ar vro, gwisket evel eur brinsez, manegou war he daouarn, eunn tok ledan, kurunet a vokejou faoz, spillennet enn he bleo tounset war gern he fenn, hag azeet ken braoik ha tra e-kichen eunn aotrou a lavarar ne dle kaout nemed eul lagad mad, rag war egile e oa eur werenn c'hlaaz-tenval dalc'het ouz he fri gand orchal ar-chant.

— Da vihana, eme Vari, ma vije bet eat pell diouz ar vro, med ar golladenn e deuz ann divergontiz d'en em ziskouez dre ama ha daoler ann dismegans war-n-omp ; ann holl a anavez brema petra eo deuet da veza, ha mez am oa o treuzi ar bourg disul, rag ar merc'hed iaouank a guzule enn eur zellet a-dreuz ouz-in.

— D'ar foar diveza ivez, eme Jakez, em euz gwelet mad e oa va mignonned ienoc'h em c'henver.

— Lan geaz, bugale geiz, eme Ivona, va c'halon a rann oc'h ho klevet, med arabad difisiout e Doue, ha kentoc'h eget taoler malloz war Mac'haridik, pedomp eyit ma tistroio d'ar gear ar bugel dianket.

— Distrei d'ar gear ! eme Lan, kentoc'h e tistrofe dour ar ster d'he eienenn ; O ! ma c'hellann lakaat ann dourn war-n-hi !

—o—

Eur bloaz a zo tremenet ; abaoue n'oa ket bet gwelet Mac'haridik dre ar vro. Lan hag he vugale a zo laoueneat eunn nebeud, rag brema p'oa eat ar golladenn pell diouz Breiz, e vije ankounac'heat marteze. Ivona avad, siouaz ! ne ehane ket da ouela ha da bedi

Mezion hag aochou Breiz-Izel, araok m'oa great ann henchou houarn hag ar c'hiri-tan, n'oant anavezet tamm gant tud ar c'hearitou braz ; hirio al lakisien a gouez enn hor bro niveruz vel kelien, dreist holl enn hanv. Lod a lavar e vezo dre ze pinvidikeat Breiz-Izel, n'ou-zounn ket, med aoun am euz na gollfemp, ma ne daolomp evez, traou talvoudusoc'h eged ar binvidigez ; ar feiz, hor iez hag hor giziou a ra hon nerz hag hon eurusted.

Er bloaz-ma ann hanv a ioa kaeroc'h eget biskoaz ha niverusoc'h oa ivez keriz.

Eunn devez, war-dro peder heur diouz ar pardaez, kirri-tan a zeue euz ann aot ; mont a rean evel an avel ; m'oar vad e oa kevatal etrez-ho evit klask p'hini a iafe ar buana.

Eunn eunn taol kount unan anezho a iez a-benn ouz moger ar point a zo ugent kammed a boan diouz Kerster. Kriadennou spontuz a oe klevet raktal. Ian, Jakez ha redaz war al leac'h. Pebez gwel skrijuz ! Aotrou ar c'harr-tan hag he vevel a ioa beuzet enn ho goad, maro mik.

Mari a oe war ar mare da zempla pa glevaz klemmadennou hag a zeue euz ar foennok enn traon d'ar point. Buan ec'h ankounnac'heaz ar re varo rag, a zouje, unan bennag c'hoaz a dlle beza er c'harr-tan hag a c'heller savetei marteze.

Eun itroun gwisket kaer meurbed a ioa astenne war al leton e ribl ar ster.

A boan m'e doa Mari taolet eur zell war zremm drouklivet ann itroun ma kriaz gand eur vouez estlam-muz : Va zad, Jakez, deuit buan ; Mac'haridik ! Va Doue ! Va Doue !

Epad an amzer-ze ar c'hirri-tan all a ioa deuet war ho c'hiz ; enn unan e oa eur medisin hag a anzavaz e oa maro an Aotrou hag e vevel. Tostaat a reaz neuze ouz Mac'haridik, ha goude beza sellet piz e lavaraz : Ann Itroun-ma n'eo nemet semplet, dougennit anezhi beteg ar ferm ; eur mare hepbken war ar gwele hag e vezo pare rag n'e deuz glaz ebet a c'hiz all.

Mac'haridik a oe astennet war eur gwele er zolier hag ar medisin goude beza displeget ar pez a ioa da ober, a lavaraz e teufe d'hi gwelet d'ann deiz [war lerc'h.

Koulskoude Lan, a ioa chomet beteg neuze evel strafillet, a zeuaz enn-han he hunan hag ar gounnar a c'hanaz a-nevez enn he galoun.

— Skrivet eo eta, eme-z-hi, e tle va merc'h fall chom da ampoezonni hor buez holl, rag, panefe-ze, penaoz e vije beo c'hoaz, goude eul lamm ker spoutuz ? Ann diaoul m'ar vad a zo enn he c'horf !

Ivona a en em gavaz d'he zro enn ti ; edo o tont euz ar bourg ha ne c'houie c'hoaz netra euz ar pez a ioa tremenet. Pa welaz n'oa den enn traon e pignaz d'ar zolier. Mac'haridik beteg-hen n'e doa finvet na lavaret eur ger. Ivona o welet eun Itroun gaer, drouklivet holl, astennet war ar gwele, a c'houlennaz, sebezet, petra ioa c'hwervezet.

— Sellit mad, eme Lan, al limansen a zo anezhi n'eo ket maro, hag ar medisin zoken en deuz lavaret e pareo dizale.

— Mac'haridik ! Mac'haridik ! Va merc'h kez ? a griaz Ivona, enn eur hi briata.

D'ar Vouez kalounek-se Mac'haridik a a zivor fila hag a zigoraz braz he daoulagad euz a bere ar zellou glac'haruz hag ankeniet a iea euz an eil d'egile.

— Va zad keaz, mam baour, Jakez ha Mari, pardounit d'in me o ped, en despet n'em euz truez-ebet da c'chedal, a huanadaz ar bec'herez.

— Pardouni d'id, eme Lan, lorgen ma 'z oud, pa na peuz m'ar vad ken toul nemed da heul a nevez da dechou hudur ! Nan, biken. Kea er meaz euz ann ti-ma hag hiviziken euz ar vro, rag da skouer fall a zo stagusoc'h eged al lorgnez hag ar vosen.

Jakez ha Mari ne gredent lavarent grik, rag e Breiz Izel ar vugale n'o deuz ket d'en em emel euz ar pez e zo etre ann tad hag ar vamm.

Lan a ioa o vont da gregi e bleo Mac'haridik evid e stlepa er meaz euz an ti, med Ivona a lammaz enn eun taol kount etre heñ hag hi, ha gand eur vouez grons ha nerzuz : Araok ma 'z ei Mac'haridik er meaz me a varvo kentoc'h.

— Lan, evel o tihuna euz eunn huvre fall, a jomaz a za mantret, rag biskoaz he c'hreg n'e doa enebet out-han evel-se ; med Ivona a-nevez a vriataz Mac'haridik, evel vid he diwal ouz kounnar e zad.

— Truez, va zad, truez, a erbede Mac'haridik ; me jomo, ma kirit, da blac'h gan-e-oc'h.

— Klevet a rit Lan, eme Ivona, oc'h astenn he breac'h evit diskouez d'ezhan ar grusifi a ioa ouz ar voger etre ann armel hag ar prenestr ; ar Zalver en deuz pardounet d'he vuntreien, daoust ha n'eo ket red da eunn tad pardouni d'he vugale pa griont truez a-greiz ho c'haloun,

Ar c'homzou diveza-ma a iez ken doun e kaloun
Lan ma vriataz e verc'h.

Pa zeuaz, ann deiz war-lerc'h, ar medisin da Gers-
ter, e oe sebezet o welet ann Itroun gwisket gant dil-
lad eur plac'h diwar ar meaz.

Ha brema, e larer, heb aoun d'en em fazia, enn eur
gomz euz tiekerien Kerster :

Pebez tud eüruz !

PER PRONOST (barz Treflez).

MA BRO GARET

War don : *Emgann a Tregont.*

Ma Bro zo hanvet Breiz-Izel
N'euz ket eur vro kaeroc'h er bed
War hon lanneier an avel
A gendalc'h da c'houeza bepred
Ha dre holl tro zro d'an Arvor
E klever trous spontus Ar mor !
Tud ma Bro ger, ar Vretoned
Zo tud leal ha kalonek
Labourien martoloded
Pobl dispont ha pobl karadek
Mez evit difenn Breiz Izel
Peb Breizad zo prest d'ar brezel.
D'ar Sul e tint mouez ar c'hleier
Ebarz peb tour bransigellet
Ha war an henchou e weler
Potred ha merc'hed o kerzet
Hastit, hastit, barz an iliz
Ez eo komanset an ofiz !
E kreiz peb traonien red eur ster
N'eur ruillen warzu ar mor braz
He c'han dudius ha seder
A dreuz al lan, ar prajou glaz
En eur laket ar melino
A hed da hed da vond en dro.
Epad ar goanv ma Breiz Izel
Zo kaoniet 'vel eun intanvez,
Mez pa ve distro miz ebrel
Ve lawen vel eur bennerez,
War peb balan, peb brug, peb kleun
E ve guelec digor eur bleun.
Barz ar meaz 'vel barz ar c'hearieu
Birvidik eo ar brezonek
N'eo ket maro iez hon tadou
Eur iez ken koant, ken karadek ;
O n'eo ket c'hoaz tost da vervel
Langach enorus Breiz Izel !

ERWAN SÉBILLOT

Leorlennadur

Evit farsal gant « *Barh labourer* », 2 wennek. E ti Loeiz
Herrieu, Candan (Morbihan).

Sed aman eun tammik leor bihan hag a vezo lennet zur
meur a gant anezan kostez an Oriant. An holl eno a anvez
mad Loeiz Herrieu, ar barz kalonek hag hegarat, a guz
a-wechou e hano dindan lezhano « *Er barh labourer* », hag

ouspenn anaout anezan a rer : Karet eo gant kemend den
a oar pegemend a boan e kemer evid ar brezonek, ar feiz
hag ar c'hiziou mad.

Sethu 'ta eul levrik bihan neve voulet gantan, (an eil
eo, zonz ho peuz c'hoaz deuz e leorik all : *Ketan Fesken*).
Ebarz *Evit farsal*, Loeiz an neuz laket eur toulladik soniou
diwar-benn ar merc'hed, pe gentoc'h eneb da siou fall mer-
c'hed e gartier : Eneb d'ar re anezo a gar mod kaer, eneb
d'ar re a fell d'ezo gwiska tokou ha teul e-kuñt o c'hoeffou ;
eneb d'ar re a gar an danz gall gant son eun akordeon, hag
e vez kignet ho diskouarn gant c'houitel ar binioù.

En eur pennad diviz, araok unan euz soniou *Evit farsal*.
Loeiz Herrieu a gont d'eomp gant eur mousc'hoarz penoz e
oa darbed d'ezan beza divragezet ha frêet gant merc'hed e
gorn-bro evit beza savet soniou diwar o fenn. Mez Loeiz
n'en em lezaz ket ober, vel just, hag e talc'haz da zevel so-
niou ha soniou c'hoaz war al liperezed, ken 'benn ar fin, ar
re-ma a gemeraz aoun deus ar rimeller hag o goapae hep
truez, hag en em lakechont, evit beza espernet en amzer
da zond, da vonjouri anezan deuz ar pella m'her gwelent.

« Merc'hed me harter, eme Loeiz, ne briz ket mui komz
brezonek. Mez ind e gonz gallek ag er finan ! Ne zansant
ket mui eüe anehê en danseu koh : ich ! piu a garche saill
else e larant ind ? *Koupabl* (kapabl) e vehemp de zistag hun
halon en hun breiz !!... Ind e gar guell danseu Bro-Gal, rag
a pe vent doh ou dansal, ind e hell troeien fonus ha dis-
kocin else d'e re e ye e sellet doh têt, penaus ou des dantel
braù doh ou lavregeu !! »

En eur gir, birvi ra levr bihan Loeiz Herrieu gant eur
spered farsus ha dizroug war eun dro. Esperomp e teuiò
a-ben evelse da zistrei merc'hed meazou Breiz-Izel deuz
ho mojou zod.

Mez ne 'meuz ket komzet c'hoaz deuz ar gwella pez-
barzoniez a zo el leorik deuz *Guerzen farsus aveit brudein
Tetah* (ar Pemoc'h) *roue ranteleh er moh lart hag entru ol
er perhel bihan.*

Ouz lenn houma 'vat eo red d'an nendibrenna evit gal-
lout c'hoerzin eaz !

Mad eo, Loeiz, mad eo da labour !.. N'eo ket re lavaret
eo par ar werz farsus-ze d'ar gwella hini en defe bet savet
ar Guiader e-hunan, en gallek, en e levr « *La Chanson du
Cidre* ».

Marvail an ene naounek gant « *Tanguy Malmanche* »,
Pariz, 4, rue Léopold Robert.

Ar marvail kaer-ma, bet moulet da genta er gelaouen-
gelc'h *Hermine*, a oa bet neuze remerket ha barnet mad gant
an holl Vretoned a lennaz anezi.

Rimet eo gant eur wiziegez hag a ziskuez en deuz an
obérou eun anoudegez leun deuz ar iez brezonek. Ar mar-
vail a zo dramatik. da lavaret eo great evit beza c'hoariet,
ha bet eo c'hoariet eur wech en ti Malmanche e-hunan, gan-
tan (Yan Verek) gant Urien Koant (An Ankou) ha Mari Rouz
(Ar Vam).

Ar marvail a dremenn eun nozez Gouel an Anaon en
Léon. Gouzout a rit e ioa ar gredeñ gwechall, ha brema
c'hoaz en lec'hioù zo, penaoz ec'h addeue ar re varo da weled
o zi hag o c'herent da noz Gouel an Anaon : ar c'hiz a oa
neuze lezel eur banne tan en oaled, evid tomma o eskern
ien, hag aoza soubennou pere a vije lakeet evito war an
daol.

Tanguy Malmanche en deuz gouezet tenna deuz ar
c'houn plus ha madelezes-ze o deuz ar Vretoned evit o
anaon, ar peb gwella a c'halle rei, ha zavet en deuz gant
ijin diwarnezan eur pez-c'hoari hag ec'h aliomp stard hon
mignoned beleien, renerien patronachou, da lakaat dis-
plega gant o zud iaouank.

EMBANNOU

Stal-Leoriou

Ar Gwaziou

MONTROULEZ, 1, Leur-Gear Emil-Souvestr, MONTROULEZ

Niver braz a Leoriou Ofern evit Prizioù katekis
Goulu Koar a bep seurt evit an ilizou

Sebastian Ar GAK

Lez-Vren, dre Gemeneven (Pennarbed)

Leazdi Vraz : Amann flin

Savadurez-skouer a ouenn saot Breiz
JISTR A GENTA MERK.

Gwin koz a beb bro

Kaliteou braz

Gwinou - ardañt ha Likeuriou

F.-M. PERSON, Montroulez

En ti PENNVEN, kizeller

Ha garaner koat

En PONTIVY (Morbihan)

E kaver espial

Meurb breton da brenan

Hag annez all a beb seurt mod

Stal-Leoriou. --- Paperou livet

MAUVIEL

12, Ru Brest, MONTROULEZ

a werz ar gelaouennoù brezounek, hag a beb
seurt moulladurezou

Grand Hôtel d'Europe

A. BONNAUD, Perc'henn

MONTROULEZ

A zigemer "Ar Vro"

MENGLEUZIQU MEIN-DO

Er Mill-ar-Bik, Parrez Paule

KANTON MAËL-KERAEZ

Bep seurt Mein-Glaz, henvel ouz re Angers

Per NIVET, entrepreneur, PAULE

Erwan Guillou

MARCHADOUR KOAT ha PLENCH

(Koat ar Vro ha koat Hanter-Noz)

KONVERSER TEMZ

Sant-Nikolas - ar Pellem (K.-an-N.)

Kezek - Houarn --- Gweturioù - dre - dan

J. RIOU

KERAEZ -- Ru an Augustined -- KERAEZ

A werz kezek-houarn deuz ar gwella merkou

hag a bren ar re goz

a fich hag a engal anezo marc'had mad

EUN TI ALL AN EUZ EN GUÉMENE (MORBIHAN)

GWINOÙ BOURDEL

René MIDY, ha K^{oz}

75, Cours du Médoc, BOURDEL

Ha 3, rue Duhamel, ROAZON

EMBANN'OU

Levrdi Brezonek
MORIS AN DAULT

6, RUE DU VAL-DE-GRACE, PARIS, v^e
Stal leoriou koz ha nevez diwar benn Breiz
An Taolennou a ve kaset evit mann

Ar roue deuz al louzeier eo an
ULMINUCINE MOREUL
Louzou evit spura ar gwad fall, hag ober d'an dud
krenvaat. — Al litrad : 2 skoed. — An hanter-litrad :
14 real.
En ti **MOREUL**, apotiker, **LANNDERNE**

Erwan HERNOT
Kizeller Kalvariou ha Mein-Bez
Ru Lanndreger, **LANNHUON**
BET MEDALLENET SEIZ GWECH WARNUGENT

HOTEL SIMON
KALLAK, Arr^e Gwengamp, **KALLAK**
Prejou. — Kambchou
— Marchosiou. — Gweturioù —

IAN EVENNOU
Marc'hadour-danvez en SKAER
Evit kaout danvez, ha lakaat ober gwiskamanchou giz
Skaer, stum nevez ha stum goz, en em erbedi ouz an
Ao. **EVENNOU**.

Ar gwella kelaouengelc'h gallek eo ar
REVUE DE BRETAGNE
MIZIEK
Koumanant : 4 skoed ar bloaz
EN EM ERBEDI OUZ AN AO. DE LAIGUE, REDON (ILE-ET-VIL.)

Frédéric PINCEMIN
3, 5, 12, Ru-al-Lian, **SANT-BRIEK**
Mezer ; Lianach ; Danvez dillad
Kezek-houarn **CLEMENT**, **HUMBERT**, **ANDRU**, etc.
Kezek-houarn dre dan **WERNER**, **GRIFFON**, etc.

MIKEL KEINEK, toker
11, Ru Kereon, **KEMPER**

Tokeier Bretoned ha Beleien. — Mezer - Dillajou
breton. — Sier-Beaj. — Malijennou, etc.

Gwin Champagne « LA MOUETTE »
Gwir gwin a Vro Champagne

Perc'henn : Ch. Vogèle, Reims, Champagne. — En gwerz
e ti holl vare'hadourien gwin Breiz-Izel. — **Kannader :**
G. DELAFARGUE, LANVOLLON.

Gwiskamanchou diwar yuzul
DA YOURC'HIZ HA DA OFISER
R. Salaün
Kemener
BREST — 37, Streat ar Ramp — BREST

Job FRANCÈS
Marc'hadour-Gwin
LESNEVEN (BRO-LEON)

FANCH MERRIEN
EN SANT-NICOLAS-AR-PELLEM
Liver Ilizou
Alaouer ha Sternier Poltrejou

Grand Café de la **TERRASSE**
PICART, Perc'henn
MONTROULEZ
A zigemer "AR VRO"

J. AR BRETON
27, Ru Pariz, MONTROULEZ
GWIN ; ESPISIRI ; PRODUOU MARC'HAD-MAD EVID
AL LABOUR-DOUAR HAG AN ANEVALED

Le Gérant : **Etienne JACQ.**

*Les Imprimeries
de Goaziou & Jappeneau*